



Stéphane Cuisset

Ar segal, moneiz lec'hel Bro an Oriant

A-c'houde ar 27 a viz Genver ec'h eus gant Bro an Oriant un **advoneiz lec'hel** Anvet eo bet segal ha krouet eo bet gant ar gevredigezh Gwinizh-du. Un nebeud displegadennoù.

Penaos ez a en-dro ar segal?

« Evel an euro eo », a lavar e berr gomzoù **trezoler** ar gevredigezh Gwinizh-du, Jean-Jacques Piard. E Henbont e vez moulet ar bilhedoù, war paper suraet, ritennet, gant ankrouù ispisial, na c'heller ket **diverkiñ** hag ur **vandenn vagnetek**. Evit ma ne vehe ket flodet, ret-mat ober diouzh al Lezenn, e rank ar moneiz lec'hel-mañ, evel e 60 kenseurt e Frañs, bout kinniget gant ur gevredigezh. Gant Gwinizh-du ec'h eus bet choazet ur gouarnerezh a-stroll, da lâret eo hep prezidant na burev (met gant un **trezoler** alken!) pa oa bet savet e 2015 gant ar pal-se hag ar moneiz zo bet laket da vout implijet d'ar 27 a viz Genver paseet.

Piv a c'hell ober gant ar segal?

Evit gellout implijout ar moneiz-se ec'h eo trawalc'h emezelañ er gevredigezh Gwinizh-du, **eskemmiñ**

e euriou evit segalioù en 20 **kontlec'h** eskemm bennak a gaver e 30 kumun Bro an Oriant. Evit a sell doc'h ar cheñch moneiz, netra aesoc'h: « 1 euro = 1 segal, a zispleg an **trezoler**. Hag e c'heller ober àr un dro gant segal hag euro, evit paeiñ evel evit rentiñ ar moneiz ». Goude-se e c'hell ar pratikoù ober gant o segalioù e ti kevelerion ar rouedad merket gant ur makarons « Amañ e c'hellit paeiñ gant segalioù ». Gant Gwinizh-du ec'h eus betek bremañ 260 ezel evel hiniennoù hag un hanter-kant bennak a **gevelerion**: **kenwerzherion**, **artizaned**, **micherioù frank**, **pretiourion**... Gellout a reer ivez ober gant ar moneiz e marc'had Merville pe e marc'had bio ar Meurzh noz.

Da betra e servij ur moneiz lec'hel?

Pal an advoneiz lec'hel-mañ eo aesaat diorroadur ekonomikel an tiriad en ur **adlec'helaat** red ar moneiz ha degas startijenn evel-se d'an **ekonomiezh lec'hel**. En ur **bank reizh** e vez lakaet an euroioù zo bet cheñchet, an **Ekonomiezh nevez breurel**, evit sevel ur font gwarantiz.

Monnaie: Moneiz
Monnaie complémentaire: Advoneiz
Blé noir: Gwinizh-du
Trésorier: Trezoler
Billets: Bilhedoù
Papier: Paper
Encres: Ankrouù
Indélébiles: na c'heller ket diverkiñ
Bande magnétique: Bandenn vagnetek
Adhérer: Emezelañ
Echanger: Eskemmiñ
Comptoirs d'échange: Kontlec'h eskemmiñ
Conversion: Cheñch moneiz
Partenaires: Kevelerion
Commerçants: Kenwerzherion
Artisans: Artizaned
Relocaliser: Adlec'helaat
Economie Locale: Ekonomiezh lec'hel
Banque: Bank
Ethique: Reizh
Fraternelle: Breurel

Perak ar segal?

Ar ger segal zo war-un dro un anv-stroll hag ur ger hollek gourel, anavet mat e sevenadur pobl Bro an Oriant, a vez graet gantañ evit komz ag arc'hant. Dibabet eo bet Segal, àr-lerc'h meur a emvod foran, e-doug ur vot en un emvod hollek foran. ■

Evit gouiet hiroc'h:

contact@segal.bzh; **www.segal.bzh**,
Facebook: @assoblenoir2015

Vous trouverez la traduction de cet article sur le site www.lorient-agglo.bzh